

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :

(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat :  N° d'inscription :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le :  /  /

 Liberté • Égalité • Fraternité  
RÉPUBLIQUE FRANÇAISE

1.1

## Évaluation Commune

**CLASSE :** Première

**VOIE :** ☐ Générale ☐ Technologique ☒ Toutes voies (LV)

**ENSEIGNEMENT :** breton

**DURÉE DE L'ÉPREUVE :** 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 4 « Citoyenneté et mondes virtuels »**

**CALCULATRICE AUTORISÉE :** ☐ Oui ☒ Non

**DICTIONNAIRE AUTORISÉ :** ☐ Oui ☒ Non

☐ Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

☐ Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

☐ Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

**Nombre total de pages :** 4

**Baccalauréat général et technologique**  
**Langues vivantes régionales - Breton**

**Classe de première**

**Epreuve 2 : Compréhension de l'écrit et expression écrite**  
**(3<sup>e</sup> trimestre)**

|                                                 |                                                   |                                                                    |
|-------------------------------------------------|---------------------------------------------------|--------------------------------------------------------------------|
| <b><u>Niveau visé</u></b><br><b>LVB : A2-B1</b> | <b><u>Durée de l'épreuve</u></b><br><b>1 h 30</b> | <b><u>Barème 20 points</u></b><br>CE : 10 points<br>EE : 10 points |
|-------------------------------------------------|---------------------------------------------------|--------------------------------------------------------------------|

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 4** du programme : « **Citoyenneté et mondes virtuels** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.



**Gant ar ger “skinwel” e c’haller kompren “post bihan”, met hiziv e c’haller kompren an traoù en ur mod all, e-giz ma ra skipailh Brezhoweb abaoe 8 vloaz.**

E fin 2006 e oa kroget istor ar chadenn Brezhoweb gant skignañ an abadenn WebNoz gentañ, war-eeun eus lise Diwan Karaez.

Un talk-show e oa, div eurvezh abadenn o reiñ ar gaoz d’an dud pedet. Evit bezañ anavezet e-giz chadenn wir, ha kevrataet gant ar CSA, zo bet ezhomm da gaout ur “froud” abadennoù ingal bemdez. Met ur patrom all eo patrom kentañ ha pennañ Brezhoweb.

War Internet zo bet choazet skignañ ar chadenn, ha doareoù ar Web o deus levezonet ar mod m'eo kinniget : abadennoù a bep seurt hag evit an holl oadoù, skeudennoù a vez sellet oute e-lec'h ma karer ha pa garer. Saga Brittia ha Ken Tuch' eo an daou heuliad bet produet espres-kaer gant ar chadenn er penn-kentañ, e doareoù ne oa ket dioute e brezhoneg d'ar mare-se.

## **Kenlabourat**

Hiziv ec'h eo abadennoù liesseurt a vez tu da welet war Brezhoweb, produet gant ar chadenn pe gant produourien all : un abadenn evit ha gant ar vugale, « Unan, daou, tri », un heuliad evit ar re yaouank, « Foeterien, » un heuliad faltazi a galite deuet war-eeun deus Bro-Gembre, « Serr-noz », filmoù faltazi, tresadennoù-bev, ha sonerien ar vro...

Bep bloaz ez eo un 70 eurvezh “fresk” bennak a vez skignet war Brezhoweb. “Ar ganol skignañ eo zo disheñvel, met ur chadenn skinwel zo deus Brezhoweb, a vez arc'hantaouet gant ar Rannvro, ha Kuzulioù-meur Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan. Ha gant ar memes redioù hag ar chadennoù all e vez ret deomp plediñ : gwirioù skignañ ha kement zo” eme Gorinne ar Mero, kenurzhierer Brezhoweb.

## **Kefridi bublik**

Digabestr e chom ar stal, ha pa c'hallfe kas ur bern raktresoù da benn a-drugarez da skoazell vras ar Rannvro. “Forzh penaos ez eo ken gwir all evit ar chadennoù all. Ha klask a reomp kas ur gefridi bublik da benn vat, ha pa vefe meret an traoù gant ur stal brevez” a zispleg Corinne ar Mero. Abaoe ar penn-kentañ e vez kenlabouret gant oberourien all war dachenn ar c'hleweled e brezhoneg : Dizale, met ivez TVR35, Tebeo ha TebeSud, ar chadennoù lec'hel. “War genlabourat muioc'h-mui ez eomp gant ar chadennoù lec'hel. Tud prest da roiñ ur plas dereat d'ar brezhoneg zo enne. Skignañ Serr-noz, da skouer, zo disoc'h ur c'henlabour etre Brezhoweb, Dizale, Daoulagad Breizh hag ar chadennoù lec'hel” a zispleg Corinne ar Mero.

Un 42 200 den bennak (“unweladenner”) zo bet o sellet ouzh abadennoù « Bec'h de'i » ar c'houlzad-mañ, da lâret eo ur 64 % muioc'h evit ar c'houlzad 2013-2014. En tu all da 150 000 o doa sellet ouzh « Fins a la Victoria », bet filmet e Catalunya, e-korf miz Gwengolo nemetken.

“Serret ar brezhoneg warnañ e-unan ? N'eo ket ‘vat ! Er bed a-bezh e vez sellet ouzh Brezhoweb ! War hent ur patrom skinwel nevez emamp ur pennadig zo dija. Dalc'het ‘vo ganti, gant ar rummadoù oad da zont hag o modoù da vevañ ar mediaoù !” a gloz Corinne ar Mero.

Diwar ar gazetenn Ya ! d'an 28 / 06 / 2015

## **1. Compréhension de l'écrit (10 points)**

Eus petra zo kaoz en destenn-mañ ?

Penaos e c'hell bezañ liammet ouzh an danvez-studi « Bezañ sitoaiian en ur vevañ e bedoù virtuel » ?

## 2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

### Goulenn A

Renerien programmoù ar Webchadenn « Brezhoweb » a ginnig d'an dud lâret o soñj en linenn diwar-benn ar pezh o dije c'hoant da welet ha peseurt doare programmoù a vefe mat skignañ. Respont a rit dezho.

### Goulenn B

Petra a zegas ar Webchadennoù, pe al lec'hiennoù e-giz "youtube", e-keñver ar chadennoù skinwel ?